

GWERZ AN OTROU ZANT LUBIN

Patron Illiz Moëlou

Diskan:

Zant Lubin, mignon Doue, ni gân d'ac'h meuleudi;
 War ho kador en Nenvou, c'houi zo kreiz an dudi.
 Plijet ganac'hu selaou, selaou ho fedennou:
 D'hon c'horvou-ni roit yec'hed, ha fe d'hon c'halonou.

War douar gristen Bro-Frans, 'barz ar gêr a Boitier,
 Zant Lubin a oe ganet, ganet a dud dister:
 An arc'hant ne dal netra, netra nadal an aour,
 Eürus neb a gar Doue, n'eus forz nag e ve paour.

Yaouank e oa zant Lubin, da gentan pa oa êt,
 Pa oa êt d'al lenneier, da vêz gand an denved;
 El lann, da benn he zevez, pedi re peb beure,
 Ha keit-se war ar c'hlizen he zenved a beure.

E kreiz al lann o pedi, hag hen war e zaoulin,
 Kaer e oa dirak Doue, kaer e oa zant Lubin,
 Skouer e rê war an douar da gement he gwele,
 Ha plijadur en nenvou d'ar Zent ha d'an Ele.

Bemde, bemde, ar bugel a renke mont da vêz,
 Pa dremenaz n'he gichen, n'he gichen, eun devez
 Pa dremenaz eur manac'h, gantan eul levr bras;
 Ha 'n eur redek war he lerc'h, zant Lubin a laras:

"Ma Zad, me garfe ive, me garfe deski lenn,
 "Ha kavet eveldoc'h eul levr evelhen,
 "Eul levr bras evelhen, da lâret da Zoue,
 "Pedennou ha meuleudi en-tro 'pad ma bue."

'Dal ma klevas ar manac'h, gant kalz a blijadur
 A reas d'ar pôtr bihan pennad kelennadur;
 Deski mad a reas d'an ha deski penn-da-benn
 Hano al lizerennou an eil warlerc'h eben.

Ha tad ar zant a laras, pa zeuas da glevet:
 "Arabad e koll amzer ha chom gand an denved;
 "D'ar skol, d'ar skol, ma mabik, d'ar skol, hag êt timad;
 "Pedet ar Spered-Santel, hac'houi a zesko mad."

Hag en peb mare zentus, ar pôtr a yae d'ar skol,
 Na lakas ket e zanve nag e amzer da goll;
 Abenn eur pennad goude, e oa grêt he studi
 Ha raktal e c'houlennas monet d'an abati.

Zant Lubin en abati, adal ma oa digouet
 Na zebre, koulz e lâret, nemed eur fulenn boued;
 Neubeud amzer e kouske, e kouske war ar c'hoat,
 Morzet holl e izili, ken a skorne e wad.

Ar Zent gant peb izelan a n'em lak en eur rez;
Zant Lubin "touez ar venec'h, daoust d'e zeskadurez,
A rê ar stertan labour, hag er porz hag en ti,
Evel pa vije mevel d'an hollen abati.

Avit a oa er vro-ze, Avit, eun den zantel
Hag a rê da bep hini ha skouer vad ha kentel;
O klask an tu da blenât hent he silvidigez,
Zant Lubin ouz zant Avit a rez aboudegez.

Noz ha de, war an douar, noz ha de daoulinet,
Pedennou kaer a lâre an daou zant unanet,
Ha gant ton ho c'hantikou a lakent da ziston
Ar c'hoat braz, en ho c'hichen, hag ar zaonennou dôn.

Braz oa zantelez Lubin, kreski rê koulskoude,
Sklêr oa da vroïz gouzout, neubeud amzer goude,
Ouz hen gwelet oc'h ober meur ha meur a vurzud,
Hag e kever ho madou hag e kever ho zud.

Da goulz an eost, eur blâvez, an ed a yae da goll,
Dispennet 'barz ar parkou, gand glao hag avel foll;
Ha zant Lubin da bedi, hag ar glao tavet krenn,
Ha torret krenn an avel, mui bod na del na gren.

Eskob agêr a Charter a zeuas da vervel;
Ha Kildebert, roue Frans, e yaes 'n'he benn gervel,
Gervel neuze zant Lubin da zont da gas ar bob,
Da zont d'ar gêr a Charter, da vout laket d'eskob.

Ar bobl a lâre, 'eur vouez: "Mad 'neus grêt ar Roue,
"An neb zo galvet gantan, zo galvet gant Doue."
Ha brud war-dro zant Lubin, hag an holl d'hen meuli,
Ar zant adal ma klevas, goust e oa d'an zempli.

Karg an eskob, e lâre, na gemerin biken,
"Eur garg huel ê hounnez ho pounner da zougen;
"Ar zamm braz da bep krenvan a zo bet a viskoaz,
"Ha me, siouaz! eo dinerz ha dister ma diou skoaz."

Netra na dale n'em glemm; ar roue 'n oa lâret,
Ar bobl a lâre ive, ha zanti e oa red.
Ha pa oa laket d'eskob, zant Lubin gwasoc'h gwaz
A stagas he garante ouz Jezuz hag he groaz.

An drouk-spered a yude, ha kaer en oa yudal,
An hol 'barz an eskopti, beleien ha tud all,
Dalc'het gant skouer zant Lubin ha gant he gomz ive,
An holl a yae kalonek a-du gant ar gwir fe.

Ar zant a gare daou dra: ar paour, ar fe gristen;
Pa vije red ho difenn, na sponte arôk den;
Karet e oa ha doujet gant tud ar maneriu,
Doujet ive ha karet e oa 'braz ar c'hêriu.

Dont a reas an tan gwall da gregi en Paris,
Goloet kêr a voged, ha stafilhet kêris;
Dihunet gant ar gri-forz, dihunet ar roue,

Ha dioustu klasket gantan zant Lubin, den Doue.

Ha zant Lubin o tonet, o tonet a red kaer,
Ha da c'houlenn gand Doue c'harz an tan diwar gêr,
Ha na oa ket he beden, he beden peurlâret,
E oa mouget an tan-gwall hag ar gwaleur paret.

Penn-da-benn d'e eskopti e plije d'an bale,
Hag e kavas eur beleg kianv fall war e wele;
Ma doue, 'me zant Lubin: "Ho pet true outan?"
Seta raktal ar beleg ken yac'h hag ar yac'han.

C'hoaz e reas burzudou, na oar den ped ha ped.
Tud mac'hagnet ha dinerz digantan en eus bet,
En eus bet hag ar yec'ned, hag an nerz war eun dro,
Ha buhe roas ive d'eur plac'h a oa maro.

D'an ine koulz ha d'ar c'horf ar zant a re buhe,
Meur a gristen dianket 'n eus kaset da Zoue;
Evit an holl damantus, nemed evitan, nann,
Pinijen gri ha kalet a rê d'an e-unan.

Tremen seiz vloaz gant kienved e chomas kent mervel,
Neuze oa deut ar mare da Zoue d'hen gervel,
Ha darei d'han kurunen hag eurvad,
Eurvad koulz ha kurunen en oa gonet ervad.

War douar Kergrist Moelou, e bet zavet e di,
Hon zud koz ennan lîez a zeue da bedi:
Hon zud koz, tud a galon, ha kerkoulz tud a fe,
A gare an Otrou Krist ha Zent ar vro ive.

Eveltê, pelerimed, a-dreuz d'ar prajeier,
A-dreuz d'an hentchou meinek, a-dreuz d'al lanneier,
Hag a-dreuz d'ar meneou, diredet, gant fe vad,
Diredet da zant Lubin, da c'houlenn ho mennad.

Diredet, c'houi da gentan, c'houi; neb en eus kienvet,
Ha gant an droug ezili, c'houi, neb a zo brevet;
Ar re bed mat zant Lubin, a ya da gêr pare,
Hag ~~xix~~ a lâr a greiz-kalon: "Zant Lubin, trugare!"

Imprimatur

M. Le Provost, vic; gén.
Brioci Ia Augusti 1898.

Editions d'Arvor. Guingamp.

Pièce non signée. L'auteur en est Monsieur
le Gall (Alan Porzer).

.....